

# AL LANV

niverenn 5

gwengolo/here 1980

9 lur

**GWYNFOR  
EVANS :  
AN TREC'H**

## TAOLENN

PENNAD STUR	P.2
KEMBRE	P.3-4
AFGHANISTAN	P.5-6
IWERZHON	P.7
DIWAN	P.8
BRAVE NEW WORLD	P.9
A-DIZH HAG A-DAG	P.10
LABOUSED	P.11
POSTER GANT M. MALGORN	
KEMENNOU	P.14-15
FILIPIG DERO	P.16-21
GERIOU-KROAZ JOB	P.22
TRESADENNOU	P.23-24

### KEMPER : AR MARC'H-OURGOUILH!



Tudu

## pennad-stur

### MARC'H AR VEZH !

Er pennad-stur diwezhañ e oa kaoz ganeomp eus dibenn an hafiv, fin d'ar folklorachoù evit ar mare ! Allas, nann, n'omp ket evit leuskel da vont e-biou didrouz ar mell folklorach droc'h diwezhañ bet brudet ken-ha-ken dre ar vro : film Claude Chabrol a-ziv ar levr Helias "ar marc'h ourgouilh".


Dija e oa bet kavet gwelloc'h gant Per-Jakez embann e levr e galleg hepken mes an dro-mañ eur aet un tamm mat pelloc'h, lakaet eo bet tud ar Vro-Vigoudenn da gaozeal galleg-e-giz Parizianed. Ur homm brezhoneg pe galleg-giz ar vro a glevet, ur wech dre varé, gwir eo, mes n'eo ket kanañ "Pilhaouer Lokeored" a ra ur film diwar-benn ar Vro-Vigoudenn e-giz ma oa e penn-kentañ ar c'hantved. Pebezh skoultrenn memes-tra, mont da ziskouez an tremened gwisket gant galleg a-vremañ, c'hoariet gant tud dic'houzvez-krenn eus boazioù ar vro !

Ur vezh eo gwelout un daolenn divuhez kinniget deomp e penn-kentañ ar film, an eured mirdi-se a zo par d'un heuliad kartennoù-post brav digant Jos an Doare. Ar blijadur hon eus evelkent, kement ha lec'hiañ an abadenñ da c'houzout e c'hoarvez etre Plozev (distaget mod-se) ha Fouldruzig. Tamm liamm, tamm istor avat. Taolennoù a-heul da heul. Taolennoù difraostañ douar da zegas mezh da dud ar vro. An tad-kozh konter ha ne zeu ket gwall-vrav e gontadennoù galleg lennegezh gantañ. Ader lavarout ez eus un nebeut traoù dibarek, ar merc'hed o'n em stlepel er puñs, ar baotred o'n em stagañ ouz ar groug, ar baotred o lonkañ en ostaleri o gwraez ouz o gortoz skoachet a-dreñv ar voger pep a garrigell ganto da gas o gwazed-lonker, mezh warno, d'ar gêr. (Amañ e tostaer ouz Lucky Luke). Stekif a reer ouz ar politikerezh ivez gant ar Baill a zeu da di Jakez bihan. Republikan eur ha bec'h d'ar re wenn. Un tafva hon eus eus menozioù republikan ar mare gant an tad-kozh hag ar skolaer. "Deskit galleg. Ma ne ouzoc'h nemet brezhoneg, paotrig, e vloc'h staget berr e-giz ur vuoc'h ouz ar strapenn". "Hor bro n'emañ ket amañ hepken, mes mont a

ra betek ar Rhin" eme ar skolaer. Difennet eo komz brezhoneg er skol eveljust, met droc'h eo an difenn-se er film pa gomz galleg ar vugale.

N'eus nemet ar re-mañ evit hon lakaat da c'hoarzhin un disterañ. An tamm nemetañ, liv ar gwir warnañ eo prantad ar brezel gant ar merc'hed o labourat war vor, er parkeier, an tamm film dielloù war-eeun eus ar foziou-difenn ha rannalon paotr al lizhiri, ret dezhañ kas keloù marv d'an intañvezed yaouank.. A-hend-all eo deut brav-tre ar skeudennoù mes chom a ra un daolenn virdi mut dreist-holl dre ziouer a steuenn.

Berr-ha-berr e chom diwirion ar film, ken e-keñver danvez, ken e-keñver yezh. Gwelloc'h, mil wech gwelloc'h e vije bet trefi ur film a-vremañ e brezhoneg er Vro-Vigoudenn pe neuze fiziout en ur skilpailh tud eus ar vro a garg diaes da zasorc'hif an amzer gozh. Petra gortoz avat, digant tud evel Chabrol a ziskler : "Et je dis bravo à Jules Ferry pour la francisation ...." ha digant Jakez Helias n'en deus ket distaolet kemplezhioù Breizh-Izel dindan an trede republik. Ur film provifsel savet gant Parizianed, un dristidigezh evit ar Vro-Vigoudenn hizv-an-deiz, hag un dismegañs d'ar re varv n'int bet-int war film ebet.



AL LANV CPPAP : 62602

Kelaouenn diskleriet hervez lezenn  
**HERE 80**

Moulet e Bretagne Ateliers,  
146, st. An Oriant, ROAZHON

Rener : Padrig An Habask

Koumanantou : - 50 lur (boutin)  
- 80 lur (skoazell)

Da :  
AL LANV, 7 st. ar rektor P. Henry,  
35000 ROAZHON.

## KEMBRE

### AR PEVARE CHADENN

D'ar 17 a viz Gwengolo 1980 e plegas ar Saoz William Whitelaw ha gouarnamant Toried Londrez da c'houlennoù pobl kembre evit ur chadenn skinwel glok e kembraeg.

En ul lizher skrivet da g/Cledwyn Hughes (kannad kent Enez Môn a renas ar bodad kannaded aet da c'houlenn ouz Whitelaw lakaat an Doried da cheñch o diviz ha da lakaat an abadennoù kembraek war ur chadenn) e tisklerias Whitelaw e oa ar gouarnamant saoz o vont da lakaat an abadennoù kembraek war ar pevare chadenn.

E soñj emeur kregif da skignañ war ar chadenn-se e miz Here 1982 gant un ugent pe ziv eurvezh warn-ugent bennak e kembraeg. Kement-se zo nebeutoc'h eget ar pemp eurvezh warn-ugent goulenet gant Gwynfor Evans, rener Plaid Cymru, mes gouez da Nicholas Edwards, an tori a zo sekretour stad Kembre e gouarnamant Londrez, e vo an diviz war ar c'hresk eurvezhioù en tu-hont da 22 eurvezhe dalc'h ar burev skignañ kembraek.

Degouezhet eo an dra-se d'ar poent ma oa mui-oc'h-mui stad an traoù war stign ha ma kreske an emskiantegezh kembraek e Kembre.

An abeg pennañ en deus lakaet Whitelaw da adober e soñj eo kazi sur mennad Gwynfor Evans da yunañ betek ar marv ma ne vefe ket roet ar pevare chadenn da Gembreiz. Dre Gembre a-bezh e voe dalc'het bodadegoù da harpañ Gwynfor Evans ha da c'houlenn ur chadenn kembraek.

E Kerdiz ar pemp a viz Here e voe ouzhpenn 2.000 a dud o tibunañ a-dreuz ar gêrbenn da ziskouez o skoazell da w/Gwynfor Evans. Degemer entanet a voe graet ouz kemennadenn Per Denez "Kembre a vo trec'h". Dafydd Iwan, Dafydd Ellis Thomas hag Emrys Roberts - izili pennañ Plaid Cymru - a gonzas ouz an engroez. Pouezet e voe war al liamm strizh etre stourm ar pevare chadenn hag ar stourm da gaout labour evit Gembreiz.

War un dro gant ar bodadegoù-se e voe kaset d'an toull-bac'h, a bep tu e Kembre, kalz a dud a nac'he paeañ o

zaosoù skinwel - en o mesk un den eus 75 vloaz eus Penrhyndeudraeth e Gwynedd.

Ur furchenklask a ziskouezas e oa 75 dre gant eus tud Kembre a felle dezho e vefe lakaet an abadennoù kembraek war ar chadenn-se. Abalamour da se e voe ret d'an Doried asantif da c'houlennoù tud Kembre.

Hogen ret eo deomp e Kembre gortoz da welout hag-ef e vo roet trawalc'h a arc'hant d'ar chadenn kembraek da c'hellout ober abadennoù a-zoare. Lavaret en deus Gwynfor Evans e oa an trec'h brasañ gounezet biskoazh er stourm evit ar yezh kembraek. Hep an trec'h-se ne vefe dazont ebet d'ar yezh.

E dael vloaziek Cymdeithas Yr Iaith Gymraeg e voe lakaet ar gouarnamant saoz hag an azadurioù skignañ war ziwall e vefe prest ar gevredigezh da stourm da vat c'hoazh ma ne zalc'hfe ket ar gouarnamant d'e c'her, ma ne vefe ket diazezet ar chadenn e koulz pe ma ne vefe ket roet a-walc'h a arc'hant evit ma c'hellfe ar chadenn ober berzh.

Hervez Wayne Williams, kadoriad Cymdeithas Yr Iaith, e oa ar pep pouezusañ eus diskleriadenn Whitelaw, n'eo ket kement-se en dije cheñchet e soñj met e vije bet rediet d'hen ober. Lavarout a reas ivez ne oa kement-se nemet un darn eus ur stourm ec'honoc'h da dizhout gwarantif buhez ar gevredigezh kembraek.

War a weler en deus stourm ar pevare chadenn adenaouet tan ar vroadelouriezh er Gembreiz.

### DESKADUREZH

Izili' zo eus ar strollad labour e kuzul kontelezh kreiz Morgannwg a ra o mad eus digresk an hollad moneiz roet dezho gant an Doried evit ar gontelezh, da gaout an digarez da chom hep brasat skol kembraek Pont Sion Nurton. Difenn a reont leuskel eizh bugel pemp bloaz eus familhoù digembraeger da vont d'ar skol kembraek ha fellout a ra dezho e vefent kaset gant o zud da gentelioù kembraek roet e-barzh skolioù saoznek unyezhek.

Ar gerent a fell dezho deskif kembraeg d'o bugale a lavar n'eo ket just evit ar vugale. Evit deskif ur yezh e ranker klevout ar yezh. E-barzh ur skol saoznek, e-barzh un tolead saozneg eus Kembre, n'o defe ket tro ar vugale da glevout kalz kembraeg. Prest-tre eo

rener ar skol gembraek da zegemer ar vugale vihan digembraerierien d'e skol. Dijs eus ur bern bugale e-barzh a zeu eus familhoù digembraeger hag o deus desket kembraeg.

Setu c'hoazh skouer ur strollad (ar strollad labour) a ziskleir e faot dezho harpañ tud Kembre hag a dro kein ouzh ar re a fell dezho deskif yezh tud Kembre. Met n'eo ket prest ar gerent da leuskel pep tra da vont, emaint o vont da stourm ouzh ar berr arc'hant en deskadurezh da gaout ar gwir d'o bugale da gaout un deskadurezh gembraek penn-da-benn.

Kembre a savas a-enep ken taer ma voe ret d'ar verdeadurezh dilezel an traoù evit ar wech-mañ. Bez e vo muioc'h a vodadegoù da enebif ouzh ar verdeadurezh hag ouzh divizoù armerzhel gouarnamant Londrez a-barzh pell.


Spi hon eus e stourmo tud Kembre ouzh an dilabour krouet gant divizoù gouarnamant Londrez evel m'o deus stourmet evit ar pevare chadenn.

Gwelet e vo !

John IDRIS

## SIANEL GYMRAEG Yr Unig Ateb

PAM Y MAE'R ADDEWID WEDI'I THORRI?



Why has the pledge been broken?

### WELSH LANGUAGE CHANNEL

## The Only Answer

#### AN ARME HAG AN DILABOUR

Unan eus ar rannoù ma n'eo ket digresket dispignoù gouarnamant Londrez eo rann an difenn. Kalz muioc'h a arc'hant a vez dispignet d'ober bombezennoù hag armoù nevez bremañ eget a-raok. Ar soudarded eo bet kresket o fae ivez. Kement-se a ya d'ober ul lodenn eus politikerezh ar gouarnamant da vrasaat an arme. Anet eo ar politikerezh brasaat-se a strivoù an armoù saoz da duta e-touesk an dud dilabour e Kembre.

Ur vodadeg a voe aozet gant ar verdeadurezh e Port Talbot. Port Talbot zo ur vro ma kollo enni ouzhpenn 10.000 a dud o labour en dazont tost dre benn da ziviz ar gouarnamant da serrif al labouradegoù dir. Pal ar verdeadurezh oa tuta lod eus al labourerien-se. Hogen tud ar vro hag izili eus strollad republikan

# AFGHANISTAN

Tchecoslovakia 1968, Afghanistan 1979 ha war-lerc'h ? Kenderc'hel a ra politikerezh impalaerelour Moskou da flastrañ dindan e yev ar pobladou a vefe tuet da zibab un hent ne vefe ket e hini. Ar Ruzianed deut, war a lavaront, da skoazel-lañ ar bobl Afghan lazhaedet gant gouarnamant Amin, o deus lakaet ouzh ar baol Babrak Kadmal. Hogen ma ne oa ket Afghanistan evit padout dindan gwaskerezh gwad-holl Amin, gant e stourmadoù diabarzh (pistoladegoù e kuzul ar vinistred hag all ...), n'eo ket kennebeut evit degemer hini ebet eus an taolioù-kempenn kinniget gant Babrak Kadmal, an den lakaet da ren gant tankoù Moskou.

Petra a ginnig Babrak Kadmal ?

- ur strollad unanet, ennañ an daou vreur enebour kent, Parchamied ha Khalquied,
- un talbenn broadel, ennañ ar frankizourien, ar vollahed, ar gefredourien,

- kenderc'hel da adkempenn al labour-douar ha da zieubiñ ar merc'hed en ur vont dousoc'h ganti, memes tra, eget diagent,

- diorreiñ an ijinerezh bihan, an artizanelezh en ur leuskel an nor kornzigor d'ar gounid prevez,

- frankiz da gomz, d'en em vodañ, da zibunañ, da gaout kelaouennoù, da gaout meur a strollad,

- kenlabour gant an Islamegezh hag a-barzh pell cheñch liv hag arouez ar banniel.

Kement-se holl a vefe degemeret gant ur bern tud, Hogen den ebet ne gred er gouarnamant-mañ. Degaset eo bet gant tankoù Moskou, ganto e ranko mont ...

En ur vro diunvan-krenn e teu war wel, evit ar wech kentañ ur c'henlusk Afghan a-enep an alouberien. Gwall-nevez eo ar



vro-mañ, krouet eo bet gant ar Saozon 100 vloaz' zo evit disrannañ ar bobl Sikh a oa krog hec'h impalaerezh da ren da vat war ouzhpenn an hanter eus douaroù an dud a yezh Pachtou. En naontekvet kantved e strivas ar Saozon da ledañ emir-elezh Kaboul d'ar vro a-bezh a-benn bout gwarezet ouzh ar Rusianed en hanternoz hag ouzh ar Bersianed er c'hornog. Evel-just ne zeuas ket ar puzzle-se a-benn d'ober ur vro, estreget war baper hag e bed uhel ar c'houraterezh etrevroadel. Dindan ar roueselezh damlezenel-se en em gave an hanter eus ar bobl Pachtou, strolladoù etnikel niverus, an d/Tadjiked Iranat, pobloù Turk, Hazazaiz Mongolian, diskennidi soudarded Genghis Khan. Ne oa ket kalz a genseredoù ha ne oa yezh voutin ebet, war-bouez ar Farsi evit un nebeut tud desket.

Rannoù kevredigezhel diforc'h-mat a oa ivez; pobloù meuriadoù ar menezioù, labourerien-douar, kenverzhourien ha marc'hadourien ar c'hérioù, perc'henned-douar. Al liamm nemetañ etrezo a oa an Islam.

N'eus hogos kemm ebet er vro hiziv an deiz. E-touesk ar stourmerien n'eus a-unvaniezh nemet er stourm ouzh an alouberien rusian. Repuet er Pakistan e klask ar soudarded urzhiañ ar stourm, ur wall afer eo, en abeg d'o diforc'hioù.

An Hezbi Islami, ganet 10 vloaz' zo, renet gant Ekmatiar Gouligou Dine, iji-nour, 33 bloaz, ar pennstrollad a ya ar pellañ. War a seblant ez eo an aozadur-mañ an hini frametañ hag aozet ar wellañ. Nac'hañ a ra kemer perzh en n talbenn ec'hon gant ar strolladoù all eogwir e nac'h ar re-mañ anzav ez eus 0 % eus an Afghaniñ a-dreñv dezhañ. ouez da Djamiat Islami, renet gant ar 'helenner Nouraboudine Rabani, n'eo ket n niver a repuidi a zo er strollad-mañ-trollad a ra e nerzh hogen e nerzh war an dachenn-vrezel. Tamall a reont da hezbi lakaat muoc'h a bres da bakañ ar repuidi dibourc'h en o rouedoù eget da gas war-raok ar brezel. Gant Emsav an Dispac'h Islamek Moudjadidi, Arakate I Unqlabe Islami Mohamedi, Hezi Islami tuegezh Khalis ha Talbenn Dieubidigezh Islamek Gafese Gaelani ez eo Djamiat Islami ezel eus an Emglev Islamek evit Dieubidigezh Afghanistan. Diennet o deus da rener an Emglev-se ar c'helenner Sayaf, stourmer islamek kadarn hag e-maez an disrannoù strollad. Evit ma vefe unvanoc'h an harzerezh Afghan e c'hortozer e yafe ivez e-barzh an Emglev ar strollad Hezbi Islami.

N'eo ket kement-se diforc'hioù a bolitikerezh a zisrann ar pobloù en o stourm ouzh an alouberien, diforc'hioù meuriadel, etnikel ha douaroniezhel ne lavaran ket. Muoc'h dindan dalc'h an Hezbi eo ar reter. An Djamiat ez eus anezhi dreist-holl en panternoz e bro an d/Tadjiked.

Anat eo n'eo ket steuziet kuit enebiezhioù meuriadel Afghanistan gant aloubidigezh ar Rusianed. Liesoenn eo ar bobladur, Pachtoued (50 %), Tadjiked tost ouzh Iraniz, Mouristanied, mele-ganed daoulagad c'hlas, hag an holl etnioù mongol - Ouzbeckiz, Turkmeniz, Kirkliziz, Hazazaiz. Ar re ziwefañ-mañ, kelc'hiet penn-da-benn gant ar Rusianed, naoneget ha lazhadeget ne gomzer ket ne-meur diwar o fenn; penaos e c'hellfer bezañ muizulmiz a-zoare gant daoulagad damzigor ?

E pep lec'h eo ar c'hrefañv ar pennmeuriad war ar penn-strollad. Boutin eo d'an holl stourmerien avat, an Islamegezh hag ar youl brezeliañ ouzh an alouberien Rusian.

Petra a c'hell ober ar re baour-mañ, paet ker o fuzuilhoù hag o boledoù ganto a-enep an tankoù hag ar hifasakelloù kreñfwisket ? Re nebeut a armoù modern a zo ganto, un nebeut fuzuilhoù tayañ Kalachnikov, un nebeut armoù R.P.G.7 a-enep tank. Re zisingal eo ar c'hroagad ha koulskoude en em ganno an emsavididi betek o boled diwezhañ. Rak, evito, e-giz ma lavaront : "Trec'hiañ pe bezañ trec'hiet, eno n'emañ ket an dalc'h. Atebek omp dirak hon Doue, evitañ e rankomp en em gannañ ouzh ar gommuourien. Setu hon dlead ha setu tout". O feiz eo a atiz o youl stourm ha mennet int da sevel asambles ur republik islamek.

Diouzh kotez ar gommuourien rusian, daoust ma ouzont int a-bell ar re greñvañ, n'int ket deut a-benn c'hoazh da lakaat ar vro a-bezh dindan o bzh-yev. Gouzout a reont ervat e vez boureviet ha lazhet didruez ar re baket gant an harzerezh afghan (war-bouez ar soudarded Afghan muzulmat). Sankañ a reont tamm-ha-tamm en o Vietnam dezho, memes hent-ennoù ganto ha gant an Amerikaned. Ren dre an dezerzh, ar gaz, an napalm, ar magedoù tayañ ... Meur a viliañ a soudarded Rusian a zo marvet er brezel-mañ, abegou mat e-leizh ganto, ha padal e-keit-se e c'houzañv ar bobl vunut e Rusia p'eo dienez ha glac'har he lodenn eus impalaeriezh ar vro.

An Habask

## IWERZHON

Abaoe ur pennad mat e vez graet diskleriadurioù gant mistri an arme saoz en Ulster o tisplegañ eo aet an IRA da get. Deut e vefe an IRA da vezañ diefedus, hervezo. Un doare evel unan all eo da (ad)reifn fiziñs d'ar soudarded ha d'ar c'hostezennoù faskour en Ulster; lakaet e vez anezho da gredif emañ tost an trec'h. Ma 'z eo gwir ne vez ket mui kement a efedusted gant an IRA n'eo ket en abeg d'an arme saoz met pegowir o deus kemeret strolladoù ha bagadoù all perzh er stourm evit dieubidigezh ar vro.

### Stourm ar republikaned kenetrezo

E 1972, e tivizas renerien an IRA Ofisiel dilezel an armoù evit stourm war an dachenn bolitikel gant ar "Republican Clubs" en Hanternoz hag ar "Workers Party" er Su. Daou vloaz goude an diviz-se, e teuas an disrann. E miz Kerzu 1974 e kuitas daou-ugent-dre-gant eus an izili, an IRA Ofisiel evit krouif an IRSP (Irish Republican Socialist Party) hag e gostezenn armet, an INLA (Irish National Liberation Army). An disrann, asantet fall gant an IRA Ofisiel a lakaas an daou strollad da stourm an eil ouzh egile. Bill Mc Millen, mestr an IRA Ofisiel e Belfast a voe lazhet e miz Ebrel 1975. E 1977 e voe lazhet Seamus Costello, rener an IRSP, e Dulenn. An IRA Provo, avat, ne gemeras ket perzh en tagadennoù ha lazhadegoù-se.

### Emglev evit stourm war an dachenn

Klask a reas an IRA-provo en em glevout gant an INLA evit kas ar stourm war-oc'h a-enep an alouber saoz. A-gostez e voe lezet ar c'hudennoù politikel. Nac'h a reas an INLA dont da vezañ pevare bagad-stourm an IRA-provo. Karout a reas gwelloc'h chom emren, ha buan e teuas da vezañ brudet... Airey Neave, Kenlabourer Thatcher a varvas war Barking ar Parlamant e London : ur vom-bezenn a oa bet lakaet en e garr. E miz Even 1979, gant al laeroñsi vrasañ bet graet bis-koazh en ur bank (500 000 lur sterling) e deus ar Republik (Barnagh Gap, Co Limerick) en deus kavet ar strollad argant e-leizh. Daoust d'ar pezh a lavar an arme saoz o deus an IRA hag an INLA tud awalc'h hag armoù modern evit kenderc'hel gant ar stourm.

### Fichennoù adarre

Bez e vez c'hoazh an arme o labourat gant an ordinatour (gw. Al Lanv, niv. 3) E-doug miz Eost ha miz Gouhere ez eus bet graet un enklask gant ar Saozon e Ballymurphy (ur c'harter eus Belfast) evit "evezhiañ spisoc'h karterioù an IRA". An disoc'hoù a ziskouzas ez eus 75 % eus ar baotred dilabour. Muoc'h eget an hanter eus poblañ an Ulster a zo bet fichennaouet betek-hen.

Gwendal Denez



## al liamm

Kerwerc'hez  
EN UR RANBREAL  
Romant-pollis 256 pajenn  
Priz : 30 lur franko e-lec'h 40 lur

7

# DIWAN

DIWAN : TAOL 2000

Sizhunvezh skoazell etre an 22 hag an 29 a viz Du

## I - Diwan e 1980

Degemeret mat eo bet skol vamm gen-tañ DIWAN e miz mae 1977. An doare nemetañ eo da zisplegañ penaos eo kresket ar gevredigezh a zo ganti bremañ 15 skol vamm, 1 skol gentañ derez, raktres ur greizenn sevenadurel e Treglonoù ha meur a raktresoù all evit digerif skolioù a benn bloaz, 16 skolaer, 5 stajiad, 2 staeliad implijet ganti. N'eus bet skoazell ebet digant ar Stad hag ar rannvroioù, ha nebet tre gant ar Chart sevenadurel.

Evit se e rank ar gevredigezh en em frammañ ha kemer doareoù un embregerezh. Pal DIWAN' zo reiñ ul lañs nevez d'ar brezhoneg en ur reiñ ar muiañ posubl da bep bugel evit ma c'hellfe en em ziorren (developin). Ar pal-se' zo abeg kentañ ar gerent hag ar c'huzulioù skoazell, nemet evit ma c'hellfe bezañ kaset da benn eo ret deomp labourat start evit kavout arc'hant en ur aozañ a bep seurt abadennoù (kanerien, festoù noz, kermes, bazar hag all...)

23 a dud a labour amzer leun 'barzh DIWAN, un aozadur sevenadurel hag a implij ar muiañ a dud gopret e Breizh. O gopret (2.800,00 lur rik) gant tout ar c'hargoù (sokial ha mont en dro) a goust evit pep skol 6.000 pe 6.500 lur. Bep miz eta e ranker labourat evit kavout an arc'hant-se, ha n'eo ket hep poan. Gouestlet' vez kalz amzer gant stourmerien DIWAN (kerent, tud gopret ha kuzulioù skoazell) evit ijinañ ha kas da benn gouelioù h.a. Perak e rank ur familh dont da vezañ "stourmer a vicher" pa en deus c'hoant lakaat he bugel e-barzh DIWAN? Peogwir ne vez ket graet he labour gant an Deskadurezh Vroadel. 100.000 lur nevez ne dalvez mann ebet evit un ezhomm a 1.600.000 lur nevez e 1980. Ha peur e vezo ur servij publik evit un deskadurezh demokratel hag ad-nevesat e Breizh, ha DIWAN e-barzh? Ha peur e vezo desket brezhoneg ha pep tra e brezhoneg eus ar skol vamm betek ar skol veur? N'eo ket hiriv na warc'hoazh

emichañs met perak ne vefe ket goude warc'hoazh. Da c'hedal, ret eo en em lakaat a zevri da labourat evit skolioù DIWAN, evit ma c'hellfe ar brezhoneg ha sevenadur Breizh mont war raok. E pe stuj e c'hellfe ar Vretoned reiñ skoazell da z/DIWAN :

- kenlabourat start gant ar c'huzulioù skoazell,
- kalonekaat ha skoazellañ en ur gas profoù pe gwelloc'h en ur gas arc'hant en un doare ingal bep miz.

## II - Taol 2000

Etre an 22 hag an 29 a viz Du, Tud DIWAN (kerent ha kuzulioù skoazell) a yelo da welet mignoned pe amezien, stourmerien pe tud a-du gant DIWAN evit displegañ dezho petra eo DIWAN, he falioù, he c'hudennoù. Goulenn a raint diganto reiñ arc'hant en un doare ingal bep miz (virement otomatik) da z/DIWAN. Evit gwir, an doare nemetañ eo evit ar skolioù da zont a-benn eus o c'hudennoù arc'hant. Pep hini a c'hell reiñ pezh a gar ha pezh a c'hell etre 10, 20, 50, 100 lur pe muioc'h. Pouezus-tre eo evit ar gerent hag ar c'huzulioù skoazell en em santout skoazellet er strivoù a reont bemdez evit ar brezhoneg. An doare-se' zo ivez an hini eunañ a c'hell bezañ roet gant pep Breton a-du ganeomp. Leuniañ a reer ur goulenn a vez kaset d'an ti bank ha da c'houde bep miz e teu ingal keit ha ma ne vez ket cheñchet gant an hini en deus graet.

Ar pal da dizout' zo 2000 a dud e Breizh a bezh ha gant Breizhiz divroet. Ma vez tizhet ar pal-se ganeomp ez eo an hanter eus ar pezh hon eus ezhomm evit 1981 a vo gounezet. Pep skol a welo sklaeroc'h hag a c'hello neuze prientif an dazont gant muioc'h a sioulde. Ar gerent en em soursio aesoc'h deus kudenn ar bedagogiezh ha deus kudenn ar brezhoneg er familhoù; skolioù nevez a c'hello bezañ digoret-skolioù mamm ha kentañ derez.

DIWAN' zo bet diorreet a drugarez da skoazell kalz a Vretoned.

Hag a drugarezda Vretoned niverusoc'h niverusañ evit difenn o yezh e kendalc'ho DIWAN da gas da benn e labour. Evit kaout titouroù : DIWAN - 29214 TREGLONOÙ plg (98) 04.05.42

## brave new world

1 - E Longford (Iwerzhon) ez eo bet kondaonet div vaouez da zaou viz toull-bac'h evit bezañ laeret traoù en ur stal vras. Unan anezho he deus pemp bugel hag a zo bet dilezet gant he gwaz; eben he deus dek bugel hag he gwaz a zo dilabour abace seitek vloaz. Talvoudegezh an traoù laeret gant pep hini anezho a oa un tammig muioc'h eget kant lur (gall).

2 - Kalz a reuz a zo bet diwar-benn boykotañ pe chom hep boykotañ ar c'hoarioù Olumpek e Moskov. Anat eo ne bouez ket gwad Afhaniz kalz muioc'h eget buhez Biafraiz er politikezh.

Dre vras, avat, e oa gouarnamant-où Kornog Europa kentoc'h a-du gant ar boykot. D'ar memes mare e tivize ar gouarnamant-où-se, strollet er c'henvarc'had, gwerzhañ 20.900 tonennad amann da Vro-Rusia. Hag ur sakre marc'had eo hennezh : 670 an donennad (war-dro 6.000 lur gall) e vez gwerzhet gant ar c'henvarc'had d'an URSS an amann paet 1.738 an donennad (war-dro 15.000 lur gall) gant ar c'henvarc'had d'al labourerien-douar. Neuze 'ta e ro Europiz, diwar o zailhoù, 22 milion (war-dro 198 milion a lurioù gall nevez) evit kas amann da Vro-Rusia

3 - War e hent war-du Bro-Iran en deus ar c'habiten Mimis Menealos Gastumet war vourzh e vag Yannic Halcousis 242 Vietnamad, tec'het ganto diouzh o bro en ul lastez kanodig a netra ha war goll er mor. Ret eo sikotr an eil egile, fia? Hag eñ genidik eus enezenn Kupros (Chipr) en deus soñjet Mimis Menealos e c'hellfe e familh bezañ, un deiz bennak, taolet e-maez he bro ha kaout ezhomm skoazell. Fir-tout an tamm anezhañ, e-lec'h mont war-ecur d'an Iran da gas e vagad dir, ez eo aet ar c'habiten Menealos da Singapore da zilestrañ e vagad repuidi. Dilestrañ? Opala! Ken prim ha tra eo deut ofisialidi eus an UNHCR (United Nation High Commission for Refugees) war vourzh e lestr da c'houlennata, da fichennaouañ ha da zaspazhañ ar repuidi. Evit se ez eus ezhomm amzer. Ha neuze : arabat dilestrañ hini ebet ken na vo bet kavet broioù all - estreget

Singapore - da zegemer anezho. Hag evit-se ez eus ezhomm muioc'h a amzer c'hoazh! Kement-se a c'hoarveze e miz Gouere. Piv oar, marteze emañ c'hoazh Mimis Menealos e Singapore gant e 242 repud. D'ho soñj : petra 'raio ar wech kentañ ma welo c'hoazh ur vagad repuidi Vietnamat - pe Gambodjat pe me oar, war vor? Reiñ bod dezho pe sellout diouzh an tu all?

PER DENEZ

EMBANNADURIOU AL LIAMM

ROPARZ HEMON

## C'HOARIVA

C'HOARIVA I war baper kaer : 42 lur  
216 pajenn war baper all : 30 lur  
C'HOARIVA II war baper kaer : 44 lur  
248 pajenn war baper all : 33 lur

## WANIG ha WENIG

Koumanant : 40 lur

CCP Roudaut 2943-51 Rennes

Sekretourva : M.L. FAVE, Kernevez  
29250 KASTELL-PAOL

## HOR YEZH

koumanant : 50 lur

CCP Denis I499-51 Rennes

Per Denez, Ri, Ploare

29100 Douarnenez

## A-DIZH HAG A-DAG

KELEIER 'ZO N'INT KET ANEZHO

Dizoloet 'z eus bet e bro Aljeria ur garnel e derou miz Gwengolo. Un dek bet-nak a gorfoù yaouank a zo bet kavet e liorzhoù Marengo en Aljer ha dizouaret int bet. Eskern 'zo a oa bet brevet, lod all eskennet. Lazhet ha douaret e vefe bet an dud yaouank e-doug ar bloavezhioù 59-60. Perak eo chomet mut ar c'hazetennoù en Egzagon war an afer-se, p'hon eus bet tro da lenn n'uspet pennañ diwar-benn ur garnel all dizoloet en Enez Vaz ha lakaet war c'houst an Alamaned ?

Pa vo bet lavaret deoc'h e oa stok-stok ouzh liorzhoù Marengo ur c'hamp-soudard gall er bloavezhioù 59-60 ho po kavet ar respont... Bez ez eus karnelioù n'int ket anezho.

KLENVEDOU ISKIS.

Klañv eo koushet B. KARMAL, lakaet da brezidant bro Afghanistan gant ar Rusianed ( a-unvouezh eveljust ), a-daol trumm e Moskva. Taget eo bet gant ur c'hleñved ken iskis ken ne oar den ebet re vat petra eo. Aet eo neuze AL LANV da welout un den a-vicher, an Dr. Penntach. Setu ar pezh en deus diskleriet deomp: " N'eo ket ral ar c'hleñved, met trumm eo. E 1970 e oa bet taget Comulka gant ar c'hleñved-se. Un nebeut mizioù 'zo e oa tro Giered. Kalz re all a zo bet tapet ganto an droug ivez. Ar pezh a seblant souezhus awalc'h, eo e krog ar poanioù kentañ goude emsavadegoù ar bobl. Ret eo neuze d'ar reveilien mont da welout ar mestr evit kaout urzhioù. Ober a reont n'uspet mone-gone hag a-benn ar fin ne ouzont ket mui pelec'h emaint. Ar c'hleñved ne vez ket kontamus a vevel da vestr. Atav e vez ya'ch ar mestr."

Ma vefe ar bobl mestr ha dieub en he bro ne vefe ket mui a gleñvedoù ken trist.

ISTOR UN AZEN KOZH

( e stumm ur romant-kazetenn )

Brudet eo ar gazetenn Ouest-France evit he mousfent ( ! ), ar skouer gwellañ o vefe ar vandenn dreset ( ? ) Lariflette a gaver bemdez warni. Kement a sotonn lavaret gant ken nebeut a c'herioù hag a dresadennoù a lak da souezhañ, pa n'eo ket da semplañ. Emichañs e soñjas ar renerien e oa tu

dezho ober kalz gwelloc'h, da lavarout eo lakaat al lennerien da zirollañ. Deut int a-benn ha n'int ket bet pizh gant ar c'hoarzh.

Bep Merc'her ( devezh ar vugale war ar marc'had ) e vez roet deomp an tu da c'hoarzhin gant ar c'hentelioù brezhonek a vez embannet war O.F. " Ar brezoneg en eur c'hoarzhin ", ne oa ket tu da gavout un talbenn... fentusoc'h! Penaos chom hep c'hoarzhin ( memes gant ur zh ) pa lenner kement-mañ: " A-savoir et de-toi-est peinture vert à peindre de lui ? " evit ar brezhoneg " Daoust hag az-teus liou glas da livan anezan? " pe: " Oui. Sur le grenier que est une pochée choses qui est resté après les couvreurs, la fois dernier sont été à chauler la maison." ( Lezel a ran ac'hanoc'h da zivinout ar brezhoneg, ken sklaer eo... ), pe c'hoazh: " Jean-Marie, mon fils, aujourd'hui de-moi-est envie à aller à la foire à vendre l'âne Petitboiteux." Ur goulnenn koulskoude: piv eo an azen ?

UNAN ALL ! UNAN ALL ! " Etre que est gens assez dans-les villes et qui fait peindre leur chevelure gris en noir, à maison les coiffeurs, pour rajeunir, sur leur idée. ADARRE ! ADARRE ! MAR PLIJ ! " Est. Si beau est à voir que donnerais-je une pièce vingt franc pour voir de-lui, si ne saurais-je pas est été créé avec le Seigneur Dieu semblable complètement contre les ânes autres." Ya, kit buan da evañ ur banne rak start eo, OOOOO YAAAAA !!!


Ken brav all e vez displeget ar yezhadur: " Les bretonnants disent " du vin rouch " mais " du vin rouj avec du frmach. " ( Ha penaos e lavaront " débraye, ça fume " ? N'eus netra da lavarout ouzhpenn. Ret eo lenn, klask kompren ha c'hoarzhin. Neuze e chomer talbaget, fromet, boemet o welout kentelioù ken uhel o live.

G.S. Foelladenn e stumm " ar brezoneg en eur c'hoarzhin".

Kontit niver ar virgulenoù el LANV, niv. 5. Lieskementit ar sifr-se dre 4 ( peogwir ez eus pevar pav d'an azen ) ha rannit an hollad dre niver ar pikoù-estlamm ho po kavet e " Itron Varia Garmez " ( emb. Al Liamm ). Kavout a rit 183. ( Ar re ne gavont ket 183 eo ret dezho adkregiñ. ) Kemerit " En ur rambreal " ( emb. Al Liamm ) ha lakait ar bajenn 183 e galleg. Hini " ar brezoneg en eur c'hoarzhin " eveljust. An hini g/kentañ a gaso deomp al labour-se ne resevo netra. Ar re all kennebeut.

STEVEN

## laboused



SKledenn. Tudu

Ar beg gwaret (Recurvirostra avosetta)

Ral awalc'h eo gwelout al labous-mañ e Breizh. Ne blij nemet an dour sall dezhañ. Sevel a ra e neizh e bro Carmargue, e bro Afrika...

SAVETEIN GEUNIOU BREIZH HAG AL LABOUSED  
HAG A GAV BOD ENNO

Evit an darn vrasañ eus an dud ez eo ar paludoù, ar geunioù, douar-vak nemet-ken, douar ha n'eo mat da netra, douar ha n'eo ket strujus, lec'h ma ne gresk nemet brouan, raoskl ha kuchennoù gwez treut ha skribiton. Anezho tachadoù gwall arvanus mont da c'haloupat enno, devezhoù arat a daouarc'h hag a zour lor flaerius. Gwech-all e oa ar Yeun Elez (Brenilius) dorioù an ifern hag an deiz a hiziv n'eo ket cheñchet brud ar geunioù.

Techet eo an den da zistruj, da gas da get ar pezh ha ne zegaso ket gounit dezhañ, war e veno. Distreul a raio dour lous er steroù, al lastez kegin el lennoù hag an aberioù ha klask a raio leuniañ, kompezin ar geunioù didalvoud - se d'ober douar mat da arat. Gant-se ez a niver ar paludoù war zigresk buan awalc'h. E golf ar Morbihan da skouer. Ha koulskoude pinvidigezh "kuzh" ar geunioù a zo ur souezh. Ken e keñver an aprevaned, ar plant hag al laboused a gav bod enno.

Ar pep brasañ eus an houldi a zeu betek geunioù Breizh a zo tremenidi, d'z-vif a zeont e bro Rusia, Norvegia hag all. An houad beg golvaz, an houad lost gwennili, ar c'hrakek-hañv ne chomont ket gwall bell er vro met bec'h a vez lakaet d'o diskar a-rak ma tistrofent d'o bro.

A-du eo ar chasourien da stourm evit buhez ar geunioù met n'int ket a du e vije cheñchet lezennoù diboel ar chase ! Evit mirout ne vije lazhet an holl dremenidi e rankfed echuif gant ar chase war-dro kreiz miz c'hnevvrer d'an diwezhatañ. Daou pe dri deiz chase bep sizhun a vefe a-walc'h. Mat e vefe ivez difenn chaseal e-pad an noz. Al lezennoù-se a rankfe bezañ memes re e pep bro eveljust, al laboused n'int ket gwall chalet gant harzoù ar broioù !

Ma fell deomp gwelout houldi gouez, gwazi o nijal dre hor bro ez eo poent bras stourm ouzh seurt distruj pemdezlek !

Tudu



## KEMENNOU

Etre ar 15 hag ar 20 a viz Gouere ez eus en em vodet, e Berlin (Kornog), da geñver ar Berliner Festspleie (Gouelioù Bras Berlin), tud o tont eus an holl vroioù keltiek, anezho skrivagnerien, intellek-tualled, arzourien, h.a. Da heul pemp devedhiad bodadegoù-labour, gwestlet da gudennoù ar broioù keltiek, o deus an dud-se embannet daou ziskleriadur. Setu amañ testenn an diskleriadurioù-se. Evit pezh a sell ouzh an diskleriadur 1, e c'houlenn-ner ouzh ar c'hevredigezhioù, strolladoù ha personelezhioù eus ar broioù keltiek kas o c'hlemm d'an Home Secretary, Mr William Whitelaw, Home Office, London, Great Britain.

### Diskleriadur 1

Dileuridi a-berzh ar broioù keltiek, bodet er sizhun-mañ e Berlin, a ziskler kement-mañ :

- Ankeniet-bras ez int o c'houzout en deus divizet Rener Strollad Broadel Kembre, an A.O. Gwynfor Evans, kregin, d'ar 6 a viz Here, gant un diouer-boued a gaso, diouzh ret, betek ar marv, evit ma vo roet da bobl Kembre ur chadenn skinwel e kembraeg penn-da-benn ;

- Degas a reont da soñj eo bet prometet da vat ar chadenn-se gant ar gouarnamantoù sokialour ha mirour, hag ez eo bet torret ar bromesa, nevez zo, gant an A.O. Whitelaw en un diskleriadur da Parlamant Breizh-Veur, ar pezh en deus kaset Gwynfor Evans da gemer an diviz embannet gantañ ;

- Goulenn a reont neuze 'ta gant ar gouarnamant saoz da vezañ feal d'e bromesa ha da reiñ an arc'hant a zo ezhomm evit ur chadenn skinwel e kembraeg ;

- Gouestlañ a reont reiñ o skoazell da Wynfor Evans er stourm a vo renet gantañ evit rediañ gouarnamant Breizh-Veur da zerc'hel d'e bromesa ; sikour a raint anezhañ da gentañ dre vrudañ e stourm en holl vroioù keltiek ;

- Keuz o deus o welout ne vez ket gwall-breast ar gouarnamantoù kreizennour da

anavezout, e gwirionez hag evit mat, o gwirioù sevenadurel d'ar broioù bihan a zo, evit ar mare, an tonkadur anezho en o dalc'h.

Degeter eo bet an diskleriadur-mañ, a-unvouezh, gant tud eus broioù Kornog Europa bodet e Berlin da geñver Gouelioù Bras Berlin. Gant ar Gouelioù-se eo bet roet an tu d'ar broadoù kelt da zivizout kenetrezo diwar-benn o c'hudennoù hag ivez da vrudañ ar pezh a soñjont diwar-benn o amzer-da-zont o-uman.

### Diskleriadur 2

Gant ar Berliner Festspleie (Gouelioù Bras Berlin) e vez kinniget bep daou vloaz, da dud o tont eus broioù bihan gwasket Europa, ul leurenn da studiañ ha da vrudañ o c'hudennoù. Eus ar 15 d'an 20 a viz Gouere 1980 ez eus bet en tu-hont da 250 den oc'h en em vodañ e Berlin, hag int o tont eus broioù Asturias, Breizh, Kernev-Veur, Skos, Galizia-enez Manav, Iwerzhon ha Kembre. Da heul ar Simpozium a zo bet graet e-pad ar Gouelioù, ez eus bet divizet embann an diskleriadur-mañ evit lakaat anavezout menoz ar broioù meneget uheloc'h diwar-benn o amzer-da-zont e framm Europa.

Goulenn a reomp groñs ma vo anavezet gant gouarnamantoù Bro-C'hall, Breizh-Veur ha Bro-Spagn ez int kiriek eus buhez hag euvurusted ar c'humuniezhoù broadel en em gav enklozet en o harzoù hag e tegas o folitikerezh kreizennour distruj e-leizh, ken arboellerezhel ha sokial, d'hor broadoù ; da heul an distruj-se e teu deomp un dilabour grevus-tre, kontammadur an douar, ar mor hag an aer, hag, ar pezh a zo spontus-meurbet, an droug graet d'hor yezhoù hag hengounioù broadel. Goulenn a reomp ma vo anavezet d'hor yezhoù, en hor broioù, ar renk a yezh ofisiel, ha ma vint implijet er mass-media, dreist-holl er skinwel. Goulenn a reomp evit hor broioù an aozadurioù politikel a gaso d'an emrenerezh, an doare nemetañ da gaut ur politikerezh arboellerezhel doujus da ezhommoù hor pobloù, ur politikerezh a

lako un termen da wallimplij hor finvidigezhioù hag hor pobloù, ar gwallimplij-se o vezañ ar pennabeg eus kement kudenn a sav hiziv dirazomp.

Pouezañ a reomp war beder gudenn a zo da vezañ diluziet diouzhtu, kudennoù hag a ziskouez mat e peseurt enkadenn emañ ar broioù keltiek :

1 - Bez' emaoamp a-enep an dekred war an divyezheghezh e Galizia, a lak ar galisianeg evel ur yezh a-isrenk en hor bro, ha goulenn a reomp evit hor yezh ur statud ofisiel ;

2 - Goulenn a reomp ma vo savet diouzhtu un akademiezh eus ar yezh asturiet, evit ma vo roet d'ar yezh ur statud ofisiel er skolioù, er skol-veur hag er media ;

3 - Goulenn a reomp ma vo kelennet da vat hag e gwirionez yezh, istor ha sevenadur Breizh, adalek ar skol-vamm betek ar skol-veur, ha ma vo pourchaset ur servij klok skingomz ha skinwel e brezhoneg ;

4 - Diskleriañ a reomp emaoamp a-du gant tud Plogo e Breizh en o stourm a-enep ar greizenn nukleel a zo sammet warno gant ur galloud dizouj e-keñver gwirioù mab-den.

### AL LANV WAR GERAAT

Ur galv d'al lennerien hon doa embannet en niverenn ziwedhañ. Arc'hant a zo bet kaset deomp gant lod anezho, ra vint trugarekaet a-greiz kalon amañ. N'omp ket avat, evit derc'hel pelloc'h gant ar prizioù kozh, koustañ a ra kez pep tra, hag an holl a car n'eo ket diwar an embann e brezhoneg ma vo amanennet druz hor bara, setu perak hon eus divizet kentoc'h eget n'hor dije bet c'hoant da greskiñ ar priz. 50 lur e vo bremañ ar c'houlenn boutin hag an hini skoazell adalek 80 lur, gwerzhet e vo an niverenn 9 lur. Ul lamm gresk eo mes n'eus ket tu d'ober mod-all.

Goulenn a reomp diganeoc'h kenskrivañ muic'h gant ho kelaouenn, kas kemennoù hag all..., ha dreist-holl kavout deomp koumanterien all. Aze emañ an dalc'h evidomp da zerc'hel ha da wellaat.

### DIEUBIDIGEZH EVIT AR RE VAC'HE'T

Bez ez eus 21 toullbac'had politikel brezhon en toull abaoe ouzhpenn daou vloaz hanter. Perak 'ta emaoamp aze, a-dreñv ar barrinier ? Perak hon eus graet gwalldaolioù ? (hep den lazhet na gloazet). Dre ma ne oa ket doare all ebet evit lakaat anat planedenn Pobl Vreizh en amzer-se. Bremañ eo anavezet kudenn Vreizh en Europa a-bezh, ha pelloc'h c'hoazh. Pal an tarzhadennoù e oa. Glan eo an dachenn bolitikel hiziv. Deomp-ni eo da labourat.

Ne fell ket deomp, tamm ebet, e vefe diskaret hon sevenadur hag hor yezh vroadel gant un arme estren pe gant kreizennoù derc'hanel ; saotret aodoù breizh dibaouez... hep kontañ an dilabour.

Un drevadenn ez eo deuet Breizh da vezañ, abaoe pell amzer dija. Setu penaos emañ an traoù, ha setu perak ez omp di-c'houest, ni Breizhiz ha brogarourien, da vezañ dindan ur mac'homerezh bennak, ha war bennoù hon daoulin. Karout a reomp hor bro, ur pec'hed a garantez eo. Hon fazi nemetañ.

Abaoe ma 'z omp bac'het he deus savet meur a vouezh e Breizh hag e pep lec'h, evit hon dieubidigezh hag a-enep lez varn surentez ar Stad C'hall. Ul lezenn direol hag a zo kontrol da Furemglev Europa Gwirioù Mabden. Un emskiant vroadel a zeu e-touesk hor pobl hag ez eus peadra da vezañ laouen.

Poent bras eo deoc'h goulenn kreñv-tre e vefe lakaet an holl doullbac'hidi er maez. Bez ez eus tu d'hen ober. Setu perak ez eo pezeus-tre da bep hini ac'hanoc'h kemer perzh e stourm an distaoliadeg gant tud ar c'h/K.A.D.

Un arouez politikel ha brogar eo. Setu ar pezh a c'houlennomp ganeoc'h d'an nebeutañ. Fiziañs ennoc'h hon eus.

Padrig MONTAUZIER  
Toullbac'had politikel brezhon

### RAKPRENIT DORNLEVR K.A.D.

Un teulid klok eo war ar gwaskerezh, ar stourmerien doullbac'hed, gwalloù ar bolis, ar prosezioù hag ar stourm da ren a-benn diframmañ an distaoliadeg digant ar stad C'hall da geñver votadeg prezidant ar republik.

138 pajenn titouret dispar, tresadenet brav (Goutal, Malo Louarn, Nono...) da c'houlenn ar buanañ ar gwellañ digant:

J.M. SALOMON  
Flouisi  
22 200 GWENGAMP

Priz: 20 lur an tamm.  
Distaolioù adalek dek.



# DISKAR FILIPIG DERO

tudu\_gwendal

HEP BREZHONEG  
BREIZH EBET!!

YIP!  
YIP!

LAOEN OMP E VEFEC'H  
PEUET KEN NIVERUS...  
YA! HA KEMENT-SE  
EVIT SIKOUR  
AR  
BREZHONEG!

OP  
POPOR!

SETU AR PEZH EO  
ARABAT OBER!

HE  
O!

ARAK MONT KUIT E  
LEZAN A'CHANOCH GANT  
AR C'HANER BRUDET  
**SIM KAMIL!**

CHOU!

YIP! YIP!  
UR SKOUER E  
TIED BEZAN  
AR GOUEL-MAÑ  
EVIT KEMENT  
HINI A VEZ OCH  
AOZAN ABADENNOU  
E BREIZH. RET EO  
ETA, CHOM HEP  
SANKAN REUZ!

TOK  
TOK

**SIM KAMIL** HAG E **SAX SOT!**

CHEYEYE!

SAX SOT!

PAV KAOL!  
KERZH DA GACHAT GENAOUEG!  
SKARZH  
KUIT!

AOZIER  
MA REVR!

HOOOUU!

16

17



SIM KAMIL

PASTIZ

N'ON KET TAER AWALCH GANTO! RET EO BEZAN RUST!



BEZOMP RUST, TAER HA RESIS

HEP! OBER RAN WAR DRO AN AOZADUR! RET EO DIT MONT DA STALIAN DA LEVRIOÙ E KORN ALL AR PARK!... UN URZH EO!!!



Plonk



18




HA FILIPIG DERO DA DOSTAAT OUZH UR VODENNAD BUGALE O C'HOARI KANETENNOÙ... LUNEDOÙ DU WAR E FRI....

HA, NEUZE BUGALIGOÙ SETU AZE UN DEVEZH BRAV EVIDOC'H DA C'HOARI ER PARKEIER

MAMMIG! UR VILHANS!

LAERET N'EUS HOPR C'HANETENNOÙ

UR SUNER GWAD!




DILEZET ON GANT AR YAOUANK-IZOÙ IVEZ!?!

19



EIE!  
BEZOMP  
ROMANTEL!



TCHIP!  
TCHIP!



HA DONT A RAFECH,  
KOANTENNIG GANIN  
BETEK TRADN AR  
PRADIG?



PLOP!  
PLOP!

?



HA GOAP ' RAFECH  
OUZHIN, AOTROU... PA  
N'EUS NETRA EN HOC'H  
OTOD !!



OVARF!



EMAN FILIPIG DERO O KERZHOUT E KER.....

DILEZET ON  
GANT AN HOLL



AZE EMAN  
AN DAZONT  
POLITIKEL  
EVIDON

PCF

KABOUL  
A ZERO

PCF


**GERIOU - KROAZ  
JOB**  
kael 5



**A-LED**

- I - Taolig micher -
- II - Kevnemp -
- III - Kartier-mor war an tu gin -
- IV - G.S. al Latined - Tennañ a neer warnt -
- V - Taolig avel -
- VI - Rannvrois kanadian -
- VII - Bidoc'hig -
- VIII - Dibenn dia'hour da zont -
- IX - E kreizteiz Europa - Dalo'h -
- X - Evezhte pizh -

**kael 4**



**Ar bed Keltiek**

LEVRIOU - PLADENNOU - ARZ KELTIK  
RENER : GWELTAZ AR FUR

2, straed ar ROUE GRADLON

**kemper**  
**pgz : 95.42.82**

**A-ZERC'H**

- 1 - Mont e belbi -
- 2 - Dibenn anv-gwan - Porzhig-mor e-kichen an Alre (hep ger-mell) - Raganv gour -
- 3 - Pennoù fennañ - Eus rust - Dibenn anv-gwan -
- 4 - Danvez laou - Pal - Pennoù laer -
- 5 - Kêr skolañ euskarek Youenn Drezen -
- 6 - Pennoù buan - Bezradur anv-bihan plac'h -
- 7 - Div lisherem da heul - Eus damesaat -
- 8 - Renkomp -
- 9 - Penn imbitil - Tirienn a-greus -
- 10 - Polis politikel rus - Din mesket - Muioc'h eget a-salo'h -

**Psi-KOZH-NOE**



**"DEMOCRATIE FRANÇAISE" (VGE)**



GANT AR BRASAÑ NERZH E KONDAONOMP HUNTR DIBOELL AN NEO-NAZIED A GLASK RANNAÑ KUMUNIEZH AR STAD C'HALL EN UR DAGAÑ HA LAZHAÑ JUZEVIEN . GALLAOUED INT EVEL AR RE ALL ... HA BLA BLA BLA HA KAOZIOÙ TOULL...

UN DEMOKRATELEZH OMP NENESTRA



GANT AR BRASAÑ NERZH E KONDAONOMP SOTONÍ DIBOELL TUD PLOGO A GLASK MIROUT OUZH AR GOVERNAMANT SEVEL UR GREIZENN NUKLEEL E BEG AR RAZ . GALLAOUED INT EVEL AR RE ALL ... AN ARAOKAAT... HA BLA BLA BLA HA KAOZIOÙ TOULL...


UN DEMOKRATELEZH OMP NENESTRA

KEIT HA MEDO AN HOLL PREDERIET GANT KREIZENN PLOGONV  
 EDO E.D.F. O C'HOARI TROIÛ-KAMM DEOMPE-LEC'H ALL...  
 E DIRINON HAG E BRENILIS HE DEUS SAVET TURBINOÛ GAZ  
 SANSET E-SER POURVEZ HOR BRO GANT TREDAN! GOUT' OAR  
 AN HOLL N'EUS KET TREDAN A-WALC'H E BREIZH.



'MAOUT KET  
 GANTI!  
 TURBINOÛ  
 GAZ!!

BEAUBOURG  
 E DIRINON?



KARGAN  
 BOU'ELLOÛ!  
 48 TONENN FUEL  
 BEP EUR!

UN DOARE NEVEZ  
 DA ESPERN  
 ENERGIEZH!



TU'VIJE DEOC'H IMPLIJ UR FUEL  
 SKANVOC'H HAG A VIJE TEIR GWECH  
 NEBEUTOCH A VOUCHAJ O TIFOUAN  
 'MAEZ HO TURBINOÛ DAONET! 'PEUS  
 KET TRO DA BREDERIAN MARTEZE?

EO!  
 MET DAOU  
 KENTIM KER-  
 OC'H AR C'HILLO  
 WATT-EUR! HA  
 PIV A BAO  
 'GAV DIT?



SAOTRADUR DIVIZUL AN AER...  
 AR PRADEIER, AL LEGUMAS, AN EOGED,  
 AR MESKL, AN ISTR, AN DUD...

GAVEZ KET  
 UR BLAZ 'ISKIS  
 GANT AR  
 PEURIN, TE?

O! 'VIT UR  
 WECH MA 'MEUS  
 TRO PEURIN! N'AN  
 KET DA GLEMM!

2,8% soufr



E! O!  
 DISPAR!  
 HEP UN TENN  
 FUZUILH  
 MEMES!

kezako?

kefeleg?



BRETONED! DIWALLIT PEP KLEUZ, PEP PARK, PEP  
 BODENN LANN, KENKAZ E VEFE E.D.F O PRIENTIN  
 UN TAOL GWIDRE!

GWEL'  
 REZ UN  
 DRA  
 BENNAK?

'VIT AR C'HOUZ  
 'MAN O STAOTAN  
 OZH UR BOD LANN-  
 GWRACH! KAE DA  
 WELOUT PETRA ED  
 GOUEST HENNEZH  
 DA FLISTRAN!!

KOGUS  
 NUKLEUS

DISPAKAN KADC'H  
 DA FLAERIAN!

Tuduc